

KIS-429 – Pennaenn an andlid

(GE – 21 08 92)

Mar kemeromp an termenoù a zo enno ar rakger *gou-* e stadomp ne c'hoari ket hemañ an hevelep roll en amparadur ster pep termen ; zoken, o sellout mat, ne gavomp ket daou dermen ma ve an hevelep talvoud dik d'ar rakger. N'eus nemet keñveriañ ar verboù : *goulerc'hiñ, goupleskiñ, gounit, gouzav, gouzerc'hel...* Ar geriadurour a zeskrivo ar perzh en deus *gou-* e pep hini anezho, o tigej ur skalfad kemeradurioù ; gant ar steradurour e vo dezrannet hemañ war glask d'ar vrasañ rannster voutin, da grañell ster ar rakger.

Hogen evel ma'z eas *gou-* da gedelfenn er gerioù a anavezomp e c'hellomp lavarout hep faziañ ez ay ivez da gedelfenn e gerioù a vo savet en dazont ; ha, hep faziañ muioc'h, e tifluko gant reoù 'zo eus ar gerioù-se kemeradurioù n'hon eus bremañ mennoz ebet anezho ha dre se e vo daskemmet ken skalfad ar c'hemeradurioù, ken ar grañell ster bet lakaet a-wel gant ar yezhoniour.

D'al lenner deboner e vo reizh atersiñ : petra a ra d'ar c'hemeradurioù nevez diflukañ ? Ar Yezhoniezh a zeskriv ha ne zispleg ket. Ha da gentañ, perak e vez unded da skalfad kemeradurioù un elfenn yezh ? Ur respont 'm eus bet tro da reiñ e lec'h all — dre arlakadenn ar **yezh dierouez**¹. Hervez an arlakadenn-se e tenn skalfad kemeradurioù un elfenn yezh e unded eus unded ar galloud dierouez o c'houstennañ he arver. Amañ e klaskin dezgeriañ an arlakadenn en un doare all.

Ar yezhoniour, e kement ha ma'z eo gouezoniour, a bled gant ergorennoù. En degouezh-mañ e kemer da **ergorenn** kemeradurioù **beziat**. En eneb, e kement m'emañ war dachenn e vuhez, ar yezher a gemer da **ergerc'henn** kemeradurioù **bezus**. Er c'homzoù a zistagan war ar pemdez ez intentan plegañ da reolennoù ar yezhadur hag ar geriadur, met a-vec'h ma soñjan enno ; e lec'h all emañ kalon va freder : gant amkanioù en tu all d'ar gerioù ; evit ar re-mañ e c'houlan hepken ma vint sentus, ma lakaint e'm c'herz o barregezhioù, ma roint mouezh feal d'ar pezh a vennan lavarout. Unan a zaou :

¹ Sl. *Emsav* 126, p. 10 ; KIS-287, La-08, p. 159, 161 ; KIS-297, id., p. 188-189 ; sl. Gl. *inent*, kevatal kinniget, KIS-302, id., p. 201.

pe ganto ez eus peadra, pe a ster da vont diouzh va youl, pe n'eus ket. Ma n'eus ket, unan a zaou c'hoazh : pe e chomin bourt, pe e vin sigoter a-walc'h da dennañ diouto pezh na oa ket enno. Netra emvennus e'm frepoz. Deskrivañ ne ran ken pezh a ra pep hini bewech ma komz. Bukañ d'un amkan a vez bepred ergerc'hañ ur bezus ; e tro ar gomz, kaout da ergerc'henn kemeradurioù bezus. Devoud kreiz, kentañ, ar gomz eo ar **bezus ergerc'het**, endra zeu a eil lañs kemeradurioù beziat ar gerioù, evel mein pastur, da gefleuniañ an erged. Pa 'z eont da benn, pa dizhont kende gouezhout, en en greont bepred a briz daskemmoù bras pe vrasoc'h — ar splannañ kemm eo avat e tasorc'h ar gerioù eus o limboù d'ul lavar bev. Ar gomz evel an tan er c'hovel a vouka metal ar gerioù evel ar morzhol e dorn ar gov a bleusk o ster.

Disheñvel enta staelad ar ster diouzh a zeskriv ar steradurour. N'eo ket a-walc'h diskleriañ he deus an elfenn-mañ-elfenn ar ster-mañ-ster, ar c'hemeradurioù-mañ-kemeradurioù, ret eo ouzhpennañ emañ pep elfenn yezh engwezhiat er vaezienn nerzhoù stignet gant ergerc'hañ ar bezus ha kement-se war ar pemdez, e komzoù pep yezher. Er vaezienn-se e vez sachet pep ger a-ere e gemeradurioù, ar gomz oc'h astenn, o wariañ, o forzhañ ar re-mañ ha betek lakaat eskoriñ reoù nevez.

Seurt kas o reuziañ steriegezh an elfennoù yezh a c'hoarvez koulz lavarout hep rat d'ar yezherion — dav eo merkañ e vez gorrek kenan peurliesañ e werederezh a-hed ar c'hantvedoù. Peurliesañ, ya nemet evit ar yezhoù kouezhet a striv o yezherion d'ober dezho pignat en-dro. Evezhiek e rank o yezherion bezañ ouzh treuzfurmatur herrek ret ar gerioù hag ar sterioù : dont da yezhourion. O c'houzout ne vez e nep doare disheñvel hentoù ar yezhour diouzh re ar yezher ; ar c'hemm nemetañ eo e pled hennezh ent emouez gant gwikefreoù a c'hoari ent emdarzh gant hemañ. Bukañ a ra d'e amkanioù yezhour e-ser bukañ d'e amkanioù yezher. Diouzh ur savboent all e c'haller lavarout emañ ar yezhour hag ar skrivagner en un hevelep plegenn. An eil hag egile a gav broud d'o zrevell en anat ez eo diechu ar yezh — gant an diforc'h hepken ez eo diechuoc'h gant ar yezhour.

Emichañs ez emgavomp bremañ e tro da gevreañ un nebeut kealioù.

En dornskrid Angers 477, e-keñver an arroud “*arca Noe..caeli catarectis copulata*” e lener ar spisc'her hBr. *dlitheetic*. Hemañ hervez FLEURIOT “*exprime l'idée que l'arche de Noé est bien jointe, bien fermée contre les cataractes du ciel*” DGVB 146. Evit steriegezh ar gerioù ne vez nepred **dlidet** ouzh froudoù an ergerc'hañ. Nepred ne vez juntet mat, kloz, echu, kaougant. **Andlid** eo, hedreuz da c'hoant ar c'homzer. Kaer e vo d'ar geriadurour diskoachañ an disterañ arliv da glokaat e

zeskrivadur eus steriegezh ur ger, ne vo nepred serr ar buorzh en-dro da dropell ar c'hemeradurioù, bepred e tigorou boulc'hioù o reiñ lañs da gemeradurioù nevez.

Ur vammenn ster beurzalc'hus eo enta ar gomz. Padal, kemeradurioù nevez ur ger, evito da vezañ nevez, n'int ket estren d'e gemeradurioù kent. Arlakaet 'm eus e vez etrezo un ere a zo e orin en unded ar galloud dierouez ez eo pep kemeradur eus ar ger e weredeladenn. Un aters a sav : ha ne ve ket tu da rakriñvañ holl gemeradurioù bezus ur ger o loc'hañ diwar e gemeradurioù beziat ? Ken rakweladus eo steriegezh da zont ur ger ha ma 'z eo rakweladus istor c'hoantoù mab den. Pe, evit ar re na gavfent ket kendrec'hus ar respont-se : teskad ar c'hemeradurioù kent zo evel al leurenn c'houllo o c'hortoz an dremmourion ; kerkent ha ma teraou an dezerc'hadenn ez a al leurenn diwar wel hag e tfluk ur bed all, ken gwerc'hel hag al leurenn, petra lâran ? gwerc'heloc'h : a dra sur, an dezerc'hadenn ne gas ket al leurenn da get, hogen endra nad eo hi nemet **beziat**, ez eo **hanveziat** ar bed o tispakañ warni. En hevelep doare ma ne c'haller ket dre zezrannañ doareoù al leurenn rakwelout an darvezadur e vo hi al lec'h anezhañ, n'eur ket dre studiañ kemeradurioù bremañ ur ger evit dizoleiñ e gemeradurioù da zont. An un keñver zo etre ar gomz hag ar yezh hag etre c'hoari an dremmourion hag ar c'hinkladur. Komz zo dezerc'hañ, eleze, o vukañ dreist ar yezh erouez, mont da hanveziadoù dre fiziout war ar yezh dierouez (ar yezh ennomp, ha hi un tamm mat muioc'h eget ar yezh desket) ; zo c'hoari an den ez omp (an dudenn a biaouekaomp, ha hi kalz en tu all d'ur roll hor be lerc'hwezet).

Seurt andiended a'r yezh en he dedro, seurt andlid, a ra reiz war ar pezh a anvomp an **durc'hadur ster**. Steriegezh nep elfenn yezh ne vez deskrivadus, diogel (ha dre se n'eus anezhi ur c'heal soliadell) nemet diouzh un tu, hini ar c'hemeradurioù beziat. Diouzh an tu all, andesavelet, hini ar c'hemeradurioù bezus, emañ e dalc'h ar gomz da zont (ent strizh ez eo ar steriegezh ur **c'heal ledsoliadel**). N'eur ket evit despizañ ster un elfenn yezh evel un talvoud diasavel, pengennet, met evel un talvoud dialuskel, bepred war zont. Ha n'eo ket ar ger *ster* ur c'hendrestummad d'ar ger *istor* ? Koulskoude, n'eo ket dre e c'herdarzh ez intenter hiziv an termen **ster**, setu perak ez eo gwell, da chom diforc'hell, ober en ul lavar dik gant ar c'herienn **durc'hadur ster** da verkañ ar steriegezh en he luniadur andlidek.

Keal an durc'hadur ster a ro tro da zigeriñ ur sell yezhoniour dibarek. Azon ar bev evit ur yezh eo an andlid. Seurt perzh koulskoude ne vez anat nemet war hir amzer, zoken er yezhoù o tedreiñ a-dizh evel ar brezhoneg en hon c'hantved. War ar pemdez, e kement ma fell d'ar yezherion mont dre ul lavar resis, pleustrek, efedus e rankont neptuiñ an andlid en o lavaredoù. Anat eo, pa glevomp : “Deuit ouzh taol” ez

eomp hebiou d'an andlidek ez eo pep hini eus an tri ger hag e roomp d'ar bomm ur ster diforc'hell. En eneb, mar savomp ur varzhoneg, pell a neptuñ an andlid er gerioù ez akedomp d'e ziwall, e c'hedomp pezh a eskoro drezañ.

Meur a zoare zo enta d'ober ouzh an andlid. Tro hon eus bet da welout ez eo ur perzh diziouerus eus ar rakgerioù : boulc'hek, displevek, digor e chom o steriegezh. (E-keñver ar rakgerioù end-eeun, er c'henlabour gant Gab CHEREL a brient warno ur studienn evit Skol Veur Roazhon eo ez arverad da gentañ an termen **durc'hadur ster**.) Hogen an andlid er rakgerioù n'eo nemet un dro dibarek. Un dro all eo an **divellegezh**¹ : pa genstroller div pe lies kedrann e stader “e forc'h ster [ar gerluniad disoc'h] diouzh ar ster gortozet diwar zezrann e luniadur ” (KIS-309, La-08, p. 301). E se ez eo an divellekaat un hent brientek da zifluk ar c'hemeradurioù nevez, ul lec'h ma sach en o c'hreñvañ nerzhoù an ergerc'hañ war ar steriegezhioù.

Padal ne c'hoarvez ket an divellekaat er geriadoù nemetken. Mar degemerer da reolenn ez eo andlidek kement ger 'zo, e stader ez eus reoù andlidekoc'h eget ar re all hag o c'hoari dres el lavaradoù ur roll heñvel ouzh hini ar rakgerioù er geriadoù. Ar geriennoù *derc'hel penn, kavout penn, mont da benn*, h.a. a ziskouez ez eo *penn* unan eus ar gerioù-se, bodek outo ar c'hemeradurioù hag e tu dalc'hmat da deurel broustoù nevez, a denn eus o andlidegezh o fouez evel simant diabarzh ar yezh. Parzhiat int en un niver bras a vommoù anvet idiomatek gant ar yezhoniourion. Ne spir ket avat marilhañ ar ster **deuet** mar gwalleger an **dont** e-unan. Dre berzh ma chom andlidek gerioù evel *penn, tu, tro*, h.a. eo ez a stag outo gerioù all d'ober ar bommoù idiomatek. Keflen e vez bividigezh ur yezh da feur amsaviñ he bommoù idiomatek kozh gant re nevez.

¹ **Divellsteriek(-)** e voe furm gentañ an termen, arveret ar wech kentañ e KIS-105 (19 10 73), La-05, pp. 89-90. Diwar 1989 e voaziad ober gant furmoù kurzhet : **divellek(-)**, **mellek(-)**, **dazvellek(-)**, sl. KIS-360, La-09, p. 127n.